

Dornskridoù Milin: Kanaouennoù

5. IANN ES-KOLWENN HAG HE BAERON

(E korn ar follenn:)
1856 Larz - gardien
des subsistances

Iann Es-Kolwenn hag he baeroun
a zo deut da c'houlen pardoun,
a zo deut da c'houlen pardoun
ha de bec'hejou remission.

En ti oa noz paz int antreet
ha noz-vad en deuz lavaret :
- noz vad da holl dud an ti-man
hag eet int da gousket ennhan ?

eet eo aman 'n holl da gousket,
nemet oun me a zo chommet
a zo choumet me va unan
da laza 'r goulou da baka 'n tan.

O itroun Varia an dreinded
piou ar re man a zo deuet
mem boa alc'houezet va dorojou
ha prennet mad va bolejou.

- Ho grek, ho grek! na spountit ket
ouz ho map es-kolwenn e komzet,
/zo deut ama gant he baeroun,
deut gant va faeron dho kwelet
da c'houlen 'nn dra zo din red.

- Mar dec va map ez eo hemen
m'em boa he lianet e gwenn
hag eo deut e du dam gwelet
evit doare ez eo poaniet.

euz tan ar plubator e teuan
da dan 'nn ifern eo ez ann
da dan ann ifern da zevi
ma na garit va fardoni

penaoz e vez te pardonet
re ec'h euz Doue offanset
braz ec'h euz Doue offanset
Leorik da dad ac'h euz kollet.

- 22 -

- Leorik va zad ne de ket kollet
er mor ema triouac'h goured,
er mor ema triouac'h goured
gant eur peskik bihan o viret

'Met teir feillen ne deuz louzet
el leorik va zad ma leret :
unan dre c'hoad, eun all dre dan
eun all gant va daelou va unan

euz an dan ar plukator e teuan
da dan ann ifern eo ez ann,
da dan ann ifern da zevi
ma na garit va fardoni.

- Penaoz e vez te pardounet
re ec'h euz Doue offanset,
re ec'h euz Doue offanset
da beder c'hoar ac'h euz gwallet.

- Ouzoc'h ervad, va mam, emeuz
mez dre ar c'hilac'har hag ar c'heuz
na paz oun pardonet gant Doue,
va mam baour, pardounit ive.

euz a dan ar plukator e teuann
da dan an ifern eo ez ann,
da dan an ifern da zevi
ma na geret va fardoni.

- penaoz e vez te pardonet
re ec'h euz Doue offanset
re ec'h euz Doue offanset,
pevar bern ed c'heuz din devet.

- Ouzoc'h ervat, va mam em beuz
mez dre ar c'hilac'har hag ar c'heuz
na paz oun pardonet gant Doue,
va mam baour, pardounit ive.

euz a dan ar plukator e teuan
da dan an ifern eo ez ann,
da dan an ifern da zevi
ma na geret va fardoni

- penaoz e vez te pardounet
re ec'h euz Doue offanset
/re ec'h euz Doue offanset/

- 23 -

(Iann Es-Kolwenn hag he baeron)

/triuac'h loen gorn ap/
 devet ec'h euz din an ti forn,
 kaera loened, triuac'h loen gorn.

 - Ouzoc'h ervad, va mam, em euz
 mez dre ar c'hlac'har hag ar c'heuz
 na paz oun pardounet gant Doue
 va mam baour pardounit ive.

 - Euz a dan ar plukator e teuan
 da dan an ifern eo ez an
 da dan an ifern da zevi
 ma na geret va fardoni.

 - Penaoz e vez te pardounet,
 re ec'h euz Doue offanset,
 re ec'h euz Doue offanset,
 daou lamp arc'hant, daou aour 'c'heuz laeret

 - Ouzoc'h ervad, va mam, em euz
 mez dre ar c'hlac'har hag ar c'heuz
 na paz oun pardonet gant Doue,
 va mam baour, pardonit ive.

 Euz a dan ar plukator e teuan,
 da dan ann ifern eo ez ann,
 da dan an ifern da zevi
 ma na gerit va fardoni.

 - Penaoz e vez te pardounet,
 re ec'h euz Doue offanset
 o laza 'r belek oc'h ann aoter
 pa gorsakre korf hor Salver.

 - Ouzoc'h ervad, ma mam, em euz
 mez dre ar c'hlac'har hag ar c'heuz
 na pa zoun pardounet gant Doue
 va mam baour, pardonit ive.

 Va mam, va mam, azioud^o ho skoaz °(Rann-yezh Enez Vaz =
 sellit, gwelit Jezuz er groaz a-ziouzh, a-zioc'h)
 hennez en deveuz lavaret :
 Iann es-kolan zo pardonet

- 24 -

- Mar doud pardonet gant Doue
me es pardon, va map ive,
pardonet 'vez nab a bardon
a lavaraz an tad-paeron.

O tri mil al loar hag ar stered
o tri mil an heol benniget
eun ael euz an env zo diskennet
da gaout / Ian es-Kolan eo deuet
/ganthan zo eet/

da gaout / Ian E-skolan eo deuet
evit hen digemeret /ganthan zo eet/
evit digemeret he ene
da vont da repos gant Doue.

(Sell. e Bulletin de la Société Académique de Brest,
tome 3, 1862-3, p. 382-400 : G. Milin, Iann es Kolmwenn,
légende bretonne)